

### **Maronad evit un haroz**

Roet ac'h eus da vuhez Mikael evit da Vro  
An Arc'hael meur 'oa dit paeron  
Ha deiz e Ouel, da Ouel  
Ac'h eus aberzhet da Vuhez d'ar Vro.  
Da gevarc'hiñ 'ran Mikael ! Den yaouank-flamm.  
Brogarour kadarn, emouestlet betek ar marv  
- Ur marv evit netra - eme ur gazetenn  
Evit netra ! Netra ? Breizh 'vefe un netra ! ? !  
- Politikailherien... Roet ac'h eus da Vuhez Mikael  
Evit ar c'haerañ pal :  
Mirout ouzh da Vro da vont da netra !  
A ! Ya, me 'oar, glac'har zo e kalon da dud.  
Hag an holl vrogarourien a leñv ganto.  
Hogen, Doue meur an Neñv a lenn e pep kalon  
Hag an Arc'hael meur da baeron  
Az kemero en e Lu Neñvel evit  
Ar Stourmadoù-meur  
'Enep d'an nerzh ha d'ar galloudoù-gwaskerezh  
Ma chomo an Trec'h gant ar Gwir.  
Da gevarc'hiñ a ran Mikael, te  
Kentañ merzher ar rummad yaouank brogar.  
Doue d'az pardono !  
Joa d'an Anaon  
E Baradoz ar Gelted.  
Da viken.  
Amen

*Lannuon, 1añ a viz Here 1976*

### **Evit lid ur maen-koun da Yann-Kêl**

A galon hag a spered  
Emaon ganeoc'h mignoned  
Unanet er memes menoz :  
Doujañs ha karantez ar Vro gozh...  
Enor d'an hini en deus roet e Yaouankiz  
E Vuhez evit Stourm-meur ar Frankiz  
Da gorf, Yann-Kêl, zo chomet e douar da Vro  
Ha da viken da anv 'n hec'h Istor a chomo  
Da Vojenn 'vo kontet e korn pep oaled  
A rumm da rumm da vugale ar gwir Vretoned  
Trivliañ 'ray o c'halonoù  
Ha kerzhout 'raint war da roudoù  
Lorc'h enno o vout Breizhiz !  
Bennozh d'az memor Yann-Kêl  
Breizh da salud evel un Haroz  
Evel he gwellañ mab.  
Joa da Anaon an holl stourmerien  
E peoc'h Doue...

*29 a viz Meurzh 1978*

## Ti-Voujeret !

Divergont-bras int deut  
D'anneziñ o c'hazarn nevez  
- E Ti-Voujeret... Dineol (din an heol)  
Ha da lakat bleunioù  
Dirak monumant soudarded ar barrez  
Soudarded Breizh marvet 'vit Bro-C'hall  
- Lazhet ganti... -  
- Ha te Yann-Kael ?  
- Piv hiziv en deus bet soñj  
Da vleuniañ da vez, e Kerfeunteun ?  
- Te hag a oa da-unan en noz du  
Da-unan a-enep ul Lu.  
Aberzh glan da Vuhez  
Evel un tour-tan en deñvalded.  
Da-unan e kreiz laoskentez  
Hag eneberezh da Genvroiz  
Da-unan 'enep alouberezh  
Ar Gall trubard ha mac'hom  
Ar C'hrist ivez 'oa e-unan.  
- Kousket a rae e ziskibien -  
Hag ar Bobl a rae goap anezhañ  
Hogen, a-viliadoù, a-vilionoù  
Zo savet kristenien diwar e aberzh  
- Yann-Kael, bugel va c'halon  
Te zo an hadenn o kellidañ  
E douar krin hor c'hendadoù  
Sevel a ray diwarni kaeroc'h Lu  
Eget hini Ti-Voujeret...  
Bez e Peoc'h Doue !

*4 a viz Eost 1979*